

293

(496, suite).

*Cloarec al Laoudour.**Var ton : gennilanic Lalnez, din leveret.**Na va mamic paour, grit va quele èz,  
lar va c'halonic a zo dies. (bis)**Car va c'halonic a zo dies;  
C'hoant a meus da vont d'al leur nevez. (bis)**Ha ! va mabic qèz, mar am c'heret,  
Na d'al leur nevez c'houi ne yel get. (bis)*

(497)

*Tud chentil Lambal a vo ennàñ,  
Hac o deus resolvet ho laryan. (bis)**Bet mad pe bet fall nep a garo,  
Car d'al leur nevez me a yelo. (bis)**Ha mar be sonnerrien me zanto,  
Ha ma na ve get me a gano. (bis)**Cloarec al Laoudour a lavare  
Bars e Keryaudet pa erue. (bis)**Debonjour ha joa bars er quêr-mâ :  
Ar pennerezic pelec'h eman ? (bis)**Emedi duont bars er gampr quen,  
Ernâ e tiluya he bleo melen. (bis)**Lagit prest hoc'h habit violet  
Da vont d'ar bal gant ar c'cloarec. (bis)*

(498)

*Ar c'cloarec joaüs a lavare  
Bars el leur neve pa arrue. (bis)*

294

Sonit-hu, sonnerrien, prest ur bal,  
Ma zimp va douç ha me da zansal. (bis)

Sonet-hu demp prest uy obaden,  
Ma zimp va douç ha me en dachen. (bis)

Me a royo peb a lous aour,  
Ha na neo get fall evit drou baour. (bis)

Tud chentil Lambal a lavare :  
Erru ar c'hoarec d'al leur neve. (bis)

Erru ar c'hoarec d'al leur neve,  
Hoc e zouig coant ous e geste. (bis)

Tud chentil Lambal a lavare  
Da Gloarec al Lañudour en deiz-se : (bis)

Rubanet caer e zeo da zillat,  
Michanç c'heus c'hoant da vont hor c'hamarad ? (bis) (499)

Otrou ar Baron, va excuset,  
Serret e voa ho yalc'h pa voent paet. (bis)

Vit mont d'en em bilat na zimp get,  
Da c'hoari ar zabren pez ee querfet. (bis)

Mes gante voa peb a zabren, noas,  
Gant ar c'hoarec e voa ur pen-bas. (bis)

Griż vije ar galon na voelje  
Bars el leur neverg nep a vije. (bis)

O velet ar yēot glas o ruya,  
Gant goad ar dud chentil o reda. (bis)

Penneres Keryaudet a vouele,  
Ha na gave dey e c'honsole. (bis) (500)

Ha na gave dey e c'honsole,  
Nemet ar c'hoarec, ennes a re. (bis)

295

Ennes a lavare dei bepret:  
 Tavit, Penneres, na vouelit get. (bis)

Tavit, Penneres, na vouelit get,  
 Qen a velfot va goad o redet. (bis)

Pa velfot ar banne diverzān,  
 Grit hoch aviou da vont gantān. (bis)

Cloarec al Laoudour a lavare,  
 Bars en Keryaudet pa arrue. (bis)

Cetu ho merch' amān, Derrien gos;  
 Ma zē deut d'ar guér, me a zo cos. (bis)

(501) Cetu hi amān yac'h ha divlam,  
 Vel en deiz m'ob ganet gant he mam. (bis)

Me a ya bremān trezec Paris,  
 Da gaout ar Roue, me meus avis. (bis)

Ebars en Paris pa errue,  
 Pales ar Roue a c'houenne. (bis)

Debonjour ha joa bars er guér-mān;  
 Pales ar Roue pelec'h e mān? (bis)

Debonjour, Roue ha Rouane;  
 Me a zeu yaouancq mad d'ho pales. (bis)

Cloarec al Laoudour din leveret:  
 Un torfet benac ho peus-hu grēt? (bis)

Torfet bras avoalc'h a meus-me grēt:  
 Tud chentil Lambal a meus laret. (bis)

(502) Trivach dijentil a meus laret,  
 Hac e veritan sur beza crouquet. (bis)

Mes gante voa peb a zabrey noas,  
 Ganen ne voa nemet ur pey bas. (bis)

296

Mes ar Rouanez ne c'houlle get  
E vije ar C'hloarec punisset. (bis)

Va fagic bian, red, gery d'an traoun,  
Ha digassit din preest va scritorion. (bis)

Ma scrifin en ru hac en guen  
Ec'h allo bale en per tachen. (bis)

Mar scrifan dezan en ru hac en glas  
Bale hardi gant ur pennat bas. (bis)

Pa vezd arrui en e gantón  
Deus ur baysantéz ober un itron. (bis)

(503)

(Vol. II, p. 496-503.)  
44 str. numérotées.